

53

ISTORIOU.

TENNET EUZ AR SKRITUR - SARR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSON BANNALEC.

PEMPED LEORIK :

J O B



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

55-4

ISTORIOU



TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

PEMPED LEORIK :

J O B



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 25 Juillet 1892.

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

+ THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



Job reprend sa femme.



JOB

I.

AR MESTR BRAZ.

IN amzer ar batriarched, e veve var douar Hus eur penn-bro ; he hano Job. Eeun oa ha leal ; douja a rea Doue ha ne rea netra da ellout ober dezha displijadur. Setu perak Doue en devoa roet dezha peb tra. Seiz map en devoa ha teir merc'h ag a ioa leun a garantez evitha. Ouspenn seiz mil danvad en doa, tri mil kanval ha n'eo ket eaz gouzoud pegement a velien.

Bugale Job a ioa santel evel ho zad hag en hem garie kalz entrezho. Boazet oant da vont euz a di an eil da di egile da breja, peb hini d'he dro, hag ar c'hoarezed a veze pedet bep tro. Pa vije great eun droiad, Job a gemenne d'he holl vugale dont da ginnig gatha da Zoue eur sakrifik a binijen. Sevel a rea mintin mad ha kinnig a rea eur viktin

evit peb hini anezho. « Rak, emezha, va bugale marteze o deuz pec'het a enep Doue en ho c'halon. » Ne vanke morse da bedi evelse an Aotrou Doue evit ma chomje hen hag he vugale bepred direbech dirazha.

Ar brud anezha a ioa eat dre holl vro ar saohol. Evit tud he garter, an dud a ioa he boblad, dougen a reant dezha respet evel da vignoun braz Jehovah. Lavaret a rea divezatoc'h : « Pa edon, emezha, e nevez-amzer va buez, d'ar poent ma zoa Doue kuzet em zelt ha va bugale dastumet en dro d'in, e zeal beteg an or, el leac'h ma vije ar c'honseil brañ hag e c'hazezen var ar skabel digasset evidon.

« Ar iaouankiz ne grede ket dont dirazhon. Ar re goz a zave hag a jomme en ho za dirazhon. Ar brinsed a baoueze da gomz hag ar pennou braz a lakea ar biz var ho muzellou : ha pa zigoren va ginou evit komz outho, e roent holl d'in meuleudi.

« Holl ive e veulent ar vad a rean. Rak sikour a rean ar paour a c'houlenne bara, an emzivad en doa ezom skoazel. Daoulagad oan evit an den dall ha treid evit an den kam. Eun tad oan evit an den en dienez ha difenn a rean zo-ken an dud estren. Punissa'rean al laër ha tenna a rean digatha he breiz.

« Setu perak, pa vije conseil, den ne lavare ger ken na mije roet va aviz. Pa gomzen, an holl a ioa sioul ; ha pa vije echu ganhen da gomz, den ne lavare ger. Va c'homzou a guez e varnho evel ar gliz, ha disken a reant varnho evel glao an abar-daez var eun douar dizec'het.

« Pa zioueze d'in mousc'hoarzin outho, o doa poan

e kredi, ha studia a reant piz var va bizaj ar sonjou a ioa em ene. Evel eur roue oan e kreiz he c'hoardou, evel eur mignoun karantezuz e touez an dud ankeniet. »

Setu a-ze peger gallouduz hag eüruz oa Job. Kounta a elle c'hoaz var eun niver braz a vlaveziou ha var madou bemdez kresket. « Mervel a rin em zi, emezha, evel eul labouss en he neiz. Va derveziou a gresko evel ar greün treaz e ribl ar mor. Va griziou a zo doun en dour hag ar gliz, en noz, a drempe va deliou. »

Setu penaoz e komze Job, mestr braz Hus. N'oa ket var c'hed e vije deuet Doue ker buhan da zistrei divarnha hag an dour hag ar gliz.





II.

POANIOU.

Eun dervez, an elez gardien a ioa bodet en dro da dron an Aotrou Doue. Satan en devoue an hardisegez da vont betek enno, ha Doue a lavarás dezha :

« Euz a be leac'h e teuez ? »

— Euz fouetta bro, a respontas an diaoul.

— A guelet ec'heus-hu va zervicher Job ? n'euz ket par dezha var an douar : Eeun, leal eo, fidel d'he Zoue ha tec'het a ra dioc'h an drouk. »

Jehovah a ioa evel fouge gatha diskuez d'he ad-
versour eun den ker mad. An drouk-spered a ioa mezek.

« Kredi a rit, emezha, e zeo Job fidel d'eoc'h dre garantez evidoc'h ? A n'oc'heus ket savet eur voger en dro dezha evit hen dioual, hen, he di hag he holl vadou ? A n'oc'heus ket benniget he labourou ha kresket he zanvez ? Mez tennit digatha eun nebeud euz ar pes en deus hag e veloc'h a ne roi ket deoc'h he valloz. »

Jehovah a respontas :

« Kent-a-ze, e lakaan etre da zaouarn kement munumad en deus. Mez a-vad, ne-douchi ket outa. »

Satan a ziskamp ac'hano laouen hag a zo mall gatha goal-gass mignoun Doue.

Eur vech edo bugale Job, potred ha merc'hed, e preja e ti he vap hena, pa deuas eur c'hannad d'he di ag a lavarás dezha : « An ejenned a ioa starnied ouz an alar, an azennezed a ioa e peuri en ho c'hichen, pa zeo dirollet en eun taol ar Sabeaned var ho mevelien hag o deuz ho lazet holl. N'euz tec'het nemed hon-me evit digass deoc'h ar c'helou. »

A veac'h m'hen doa perachuet he gomz, ma tioues eur c'hannad all ag a lavar. « Tan Doue a zo kuezet euz an Env. Rostet en deuz ho loened hag ho pastored. N'euz nemed hon-me ag a me gellet tec'het evit digass deoc'h ar c'helou. »

Komz a rea c'hoaz, pa erruas eun trede kannad : « Teir banden Kaldeaned, emezha, o deus saillet var ho kanvaled hag ho laeret goude beza lazet ar re ho dioualle. N'en deus den gellet tec'het nemed hon-me evit digass deoc'h ar c'helou. »

Mez, setu eur pevare kannad e c'herruout divar err. « Ho potred hag ho merc'hed, emezha, a ioa e tribi hag ec'h eva e ti ar breur hena pa zeus savet dioc'h tu ar gouelec'h eur barr avel spountuz ag en deus taolet an ti d'an traon. Ho pугale holl a zo maro ha sebeliet dindan an atrejou. N'en deus den gellet tec'het nemed hon-me evit digass d'eoc'h ar c'helou. »

Goude kement a geleier trubuilluz, Job a zavas en he za, a rogas he zillad, a reas touza he benn e sin a gaon, hag e c'hourvezas d'an douar evit adori an Aotrou. « Noaz oun deu et euz a gov va mam, ha noaz e tistroin adarre di. Doue en devoa roet d'in peb tra : hen tennet en deus diganhen. Ra vezo benniget he hano santel ! »

Daoust ma rann he galoun, he vuzellou ne lavarjont ket eur gomz-treuz a enep an Doue a ou-

Pellik-mad oant c'hoaz dioc'h kear, pa veljont eur c'heaz den lor astennet var eur bern teil. Job oa, ho mignoun, ken dislivet, ken udur, ma ne anavezent ket anezha. Melkoniet bete goeled ho c'halon, e tiroljont da hirvoudi ha da ouela a-forz. Goude beza roget ho dillad ha goloet ho fenn a ludu, e sin a binijen, e teujont da azeza en he gichen, ho fenn gatho etre ho daouarn. Seiz dervez ha seiz nozvez a dremenjont er stuz-se, eb kaout eur gomz vad da lavaret da Job.

Job a velas neuze pegen truezuz oa he stad. Doue a zeblante hen ankounac'haat. He vignouned mantret, ne c'houient na petra da zonzal, na petra da lavaret. Beuzet er c'hlaç'har, e roas he valloz d'an deiz m'oa ganet.

« Malloz, emezha, d'an deiz fall ma zoun ganet ! Malloz d'an noz ma zo bet lavaret : « Eun den azo bet konsevet.

« An deiz-se ! ra vezo chenchet e tenvalijen ; ra blijo gat Doue an Env effassi an deiz-se euz renk an deiziou ; na baro ket an heol enna ; ra vezo e skeud ar maro ha ra vezo peb heur euz an deiz-se leun a c'huervder.

« An noz-se ! ra vezo bepred a ziout-hi eur goç'hen tenval ; arabad e deffe he renk e touez noz-veziou ar bloaz ; ra vezo eun noz tenval eb he far ha ra vezo sioul evel ar maro euz an eil-penn d'e-gile. Ra jommo kuzet ar stered ha na velo ket var he lerc'h an deiz e tarza !

« Perak n'oun-me ket maro e kov va mam ? Perak he deus-hi va digemeret var he barlen ha maget gat he leaz ? Me vije bet brema kousket sioul, e kichen ar rouanez-se o deus savet evitho

beziou kaer, e kichen ar pennou braz-se a zo leun ho falez a aour hag a arc'hant, pe otramant c'hoaz gat ar c'holladennou-ze n'ho deuz morse gueleet sklerijen an deiz.

« Eno, da vihana, ne moa ket a leac'h da gaout aoun rak an dud fall. Enò, an den skuizet a gav ehan. Eno, ar prizounier, tennet digatha he jaden, ne glev mui mouez rust an hini a ioa lakeat d'hen diouall hag ar sklavour n'hen deus mui mes-tr ebed.

« Perak eo bet roet ar sklerijen d'ar paour-keaz hag ar vuez d'ar re a zo bepred en anken, a c'hortoz ar maro eb ma sent outho, hag a drid gat levezet pa velont eur bez ?

« Allaz ! araok dribi va bara, e c'huanadan hag an huanadou a lamm euz va c'haloun evel an tarziou a lamm euz a greiz ar mor. Kement a ra din spount a deu da veza guir. A bep seurt reuziou a goez varnhon. Evidon n'eus mui nak ehan, na fizards, na peoc'h. Koezet eo varnhon buhanegez an Aotrou Doue. »





IV.

JOB TAMALLET.

RLEMMOU Job a dlle mont bete kaloun he vignouned. Hogen ar re-ma, e leac'h truezi outha a gemeras he-gomzou evit ken aliez a vlasfem a enep Doue hag he Brovidans. E leac'h konsoli ar c'heaz klanvour, en hem lake-jont da glask diskouez dezha ne c'hell eun Doue just skei nemed var ar bec'herien. Mar hen deus eta kement da c'houzañ, eo abalamour m'hen deus great torfejou braz. He damall a rejont en eur fes-soun digerne, an eil varlerc'h egile.

Eliphaz a gomzas da genta. Dioc'h ma lavar, Job n'eo nemed eun hypokrit, eun den kuzet. « Gue-chall, emezha, te a roe nerz d'ar re zister hag a zalc'he stard en ho za ar re a orjelle var ho dives-ker. Brema pa zoud kuezet er boan, ne c'heus mui an disterra nerz-kaloun ha da ene a zo strafillet. Petra eo deuet da veza doujans Doue, da basian-ted hag an holl vertuziou a reaz guechall kement a foughe gatho? » Goude beza nac'het e vije eun den mad, e fellas dezha diskuez e zoa zo-ken eun den fall. « Sonj ervad, mar plij; a morse den just a zo eat da goll? Atao, avad, e meus gulet ar

pec'her diskaret gat eur c'hoezaden a-berz Doue; ha Doue a oar, pa gar, terri he zent d'al leon koun-naret. En eur velidigez, e kreiz an noz, d'ar mare ma vez pounnerra kousk an den, eur gomzik oue lavaret d'in em skouarn : Strafillet holl, e velis eur spered e tremen dirazhon hag e klevis eur vouez henvel ouz eur c'houezadennik skanv : « An den, eme ar vouez-se, a kavet e vezo just dirak Doue ha dinam dirak he grouer? An elez n'int ket dire-bech aoualac'h dirazha; petra'vezo eta ar re a zo e chomm e tiez pri, e korvou great gat douar hag a dle beza magadurez ar prevned. » — Dioc'h ke-ment-se Job n'hen doa ket a leac'h da lavaret evit digarez e zoa eun den just. Tremen a rea dre hent an den dizoue, a ve lavaret anezha en deus griziu doun er bed-ma, hag a benn nebeud he vugale a vezo ama hag ahont eb ti nag oz; hag ho madou a vezo eat gat al laër.

Erfin, Elifaz a roas ali da Job da bedi kalounek an Doue benniget, a oar en he drugarez, sevel en he za an hini a zo kuezet ha parea an hini a zo klañv. « Eüruz an hini a zo kastizet gat Doue! Mar kar Job digemer a galoun vad ar boan a zigass dez-ha an Holl-Galloudek, an Hini a c'hlaz hag a bare, ne varvo ket c'hoaz; kaout a rei adarre ar peoc'h ha gulet a rei an niver euz he vugale e kreski evel ar foenn er parkeier. »

Al langaj-se a lakeas Job en hegar. Betek-hen, en devoa gouzanvet peb tra, eb en hem jala re, abalamour oa divlam ha m'hen devoa fizians e Doue. Ne c'houie ket perak oa bazateet gat Doue; mez soubla'rea dirak he volonte, santel. Setu per-rak, pa deuer da lavaret dezha e zeo goal-gasset

gat Doue abalamour ma zeo eun torfetour, en hem zao oc'h Elifaz : « Salo, emezha, e ve lakeat e diou bladen eur valans, en eun tu va fec'hejou, hag en tu-all ar poaniou a c'houzanvan. Ar re-ma a ve pounneroc'h eget an treaz euz ar mor hag a roffe testeni e meus leac'h d'en hem glemm. Rak an Holl-Galloudek en deus treuzet ac'hanon gat he virou euz an eil tu d'egile, hag he spountaillo ne lezont ket ganhen eur moment ehan. Galvet e meus ar maro : Plijet gat Doue selaou va feden, ha lakaat ac'hanon e ludu ! Da vihana, e kreiz ar poaniou en devezo digasset ker stank varnhon e chommo ganhen ar joa da c'helloud lavaret ne meus morse en hem zavet a enep he volonteiz santel. Ne d'oun na mean nak houarn evit herzel ouz kement a anken. Dreizhon va unan emacoun dinerz ha va mignouned a dec'h diouzin. Ia : tec'het a reont evel an dour braz a dreuz buhan an traoñiennoù, a iea var vi-hannaat, ha prest goude n'he deus ket eur banne dour evit terri sec'hed ar veajourien. Setu ho c'hi-maj d'eoc'hui holl a dec'h brema diouzin abalamour e maoun e poan. Ne c'houlennan diganeoc'h nak ho madou nak ho sikour, ne c'houlennan nemed eun dra : ma vezoc'h leal aoualac'h evit ma n'am zamalloc'h ket e gaou. »

He gamared a rebeche dezha en hem glemme re, var ho meno. Job evit serri dezho ho beg, a zispak dirazho an daolen euz he boaniou : « Ar sklavour a glask disheol ; an devezour a zo mall gatha kaout he c'hobr : Evitha, ne c'hortoz nemed derveziou fall. He nozveziou a dremen e c'hortoz ar goulou-deiz, hag an derveziou e c'hortoz an abardaez. He gorv a zo goloet a c'houlou ; he groc'hen a zo

seac'h ha skarnilet. He vuez a ia var uz eb esperans. « Bezit sonj, o va Doue, emezha, e tlean a ben nebeud tenna va huanad diveza. Roit eta konje d'in da zislonka kement a draou c'huerdo a zo en dro d'am ene. Ne ellan ket zo-ken chomm gourvezet eur moment var va goele a boan, na zigassit d'in a bep seurt spountailloù. Guelloc'h eo ganhen eur maro prim eget an angouni hir-ma ; pe da vihana, espernit ac'hanon epad an nebeud derveziou diveza-ma a meus da dremen var an douar. Petra eo an den, (eun netraik,) evit ma vezo ho lagad varnha bepred, evit guelet he holl oberou ? List ac'hanon, eur pennadik, da denna va halan. Ma meus pec'het, e petra em euz faziet, o Doue a lenn en eneou ? Perak e kassit-hu ac'hanon evel a rit, ken na badan mui ? Perak ne ankounac'hait-hu ket eur boan bennak a elfen beza great deoc'h ha ne bardonit-hu ket d'am sempladurez ? Varc'hoaz, e vezo re zivezad. Va c'hask a reoc'h da c'houlou-deiz ; mez va c'haout a reoc'h eb buez, gourvezet er boutren ! »

Baldae, pa glev Job e komz er mod-se euz a justiss Doue, a ia e kounnar, ha kemeret a ra ar gaoz, e plass Elifaz. « Pegeit amzer c'hoaz, emezha ec'h eus sonj da gomz er c'hiz-se ? Daoust a Doue a c'hell terri lezen ar justiss ? Mar deo maro da vugale, ne d'eo nemed abalamour d'ho zorfejou. Ped eta an Doue a bep galloud ; kerz dirazha dre an hent mad hag e savo evit da zikour, ha lakaat a rei ac'hanod en eur stad kaerroc'h c'hoaz eget-na oa diaraok. Ouspenn-ze, ma peuz c'hoant da c'houloud ar virionez, sell ouz ar pez a zo tremenet betek-hen. Deski a ri ne gresk ket planten ar palud

eb dour. Oueni a ra evel ieoten ar park. Evel-se e varv ive ar pec'her. Sonj eta ervad e ro Doue sikour d'an dud just ; mez dilezer a ra an den fall. Ma tistroez varzu ennh, e lakai brousc'hoarz var da vuzellou, hag en da c'hinou kantikou nevez a joa. »

Job nen doa ket tàmallet justiss an Aotrou Doue. Ar pezh a damalle oa lavar he vignouned : « Ar boan a zo atao eur bunision evit ar pec'hed. Job eta pa zeo ker goal-gasset a dle beza eur pec'heur braz. » Job a respountas da Valdad ne nac'he e nep fessoun galloud ha santelez Doue. Gouzoud a rea ive n'eus ket eun den ag a ve direbech penn-da-benn dirak Doue. Ouspenn-ze zo-ken, a pa en hem gafchen divlam ed-ha-ed, e pedfen c'hoaz ar barner braz-se da zellet a druez ouzin. « Eun dra ebken a meus lavaret evel guir, emezha, Doue a sko koulz var an den just ha var an den dizoue. Eur c'hrass ebken a meus goulennet : digass d'in ar maro hag ehana da dourmanti eun den divlam. »

— Baldad en doa lavaret e puniss atao an Aotrou Doue an dud fall. — « Kement-se n'eo ket guir, eme Job : hag ar bed-ma a zo aliez en ho galloud. Doue a laka tenvalijen var daoulagat ar barner a dleffe ho funissa ! A me, va derveziou a dremen evel eur marc'h d'ar c'halop, eb an disterra joa. Mar klaskan avechou ankounac'haat va foaniou, e sao aoun ganhen na deuffe va oberou, dibarfet evel ma zint, da lakaat Doue da zevel em enep. Evel-se eta, pa rear d'in evel da eun den fall, e meus kollet va foan e veva ervez ar justiss. Ne dal ket ar boan d'in ken nebeud klask en hem burifia. Rak a pa deuffen guenn evel an erc'h, e chommin evelato

dirak an Doue a sko var ar re vad hag ar re fall, evel beuzet el lagen. Gouskoude ne fell ket d'in komz ouz Doue evel pa ne ve nemed eun den evel-dhon na goulenn digatha perak e ra ar pezh a ra. Rak etre Doue hag an den n'eus barner ebed ; hag an taoliou pounner a zo koezet varnhon o deus spountet va ene hag a vir ouzin da gomz didroidel. »

Job a reas eun ehan. Mez-ker kaled oa he boaniou, ma titollas adarre da hirvoudi : « Skuiz oun gat ar vuez-ma, emezha, ha lezer a rin da gomz va c'haloun bruzunet. O va Doue, n'am barnit ket eb diskuez d'in perak oc'h ker rust evidon. »

A mad e kavit-hu tamall ac'hanon e gaou, va goaska goude m'eo c'hui o c'heus va c'hrouet, ha rei an dorn d'an dud fallagr ? Oh, nan ! a dra-zur. Ouspenn, ho taoulagad n'int ket daoulagad kig evel hon daoulagad-ni ne velont nemed an dianvez. C'hui a vel diabarz an eneo. Ho plaveziou n'int ket ber evel re an den ha n'oc'h eus ket ezom d'en hem hasta da bunissa an disterra drouk or beus great deoc'h. Gouzoud a rit n'oun ket eun den dizoue ha n'eus ket unan ag a c'helfe va zenna a dre ho taouarn. Petra eo deoc'h eta beza va zaolet ken izhel, goude ma oc'heus kemeret ar boan da ober ac'hanon gat ho taouarn ? Sonjit ervad oc'h eus va mezet evel eun tam pri-prad, oc'heus stardet va izili, guisket varnon kig ha kroc'hen, c'huezet ennhon ar vuez hag ho trugarez e deus diouallet mad va ene. Daoust ma zema ar zonz-se down en ho kaloun, me a c'hoar n'ho c'heus ankounac'heat netra. M'am beuz great deoc'h eun drouk bennak, perak goude beza daleet keit, ne roit-hu ket d'in

hirio konje d'en hem burifia ? Nan ; nan ! ma meüs bevet er pec'hed, goaz aze d'in ! ha ma meüs bevet ervez ar justiss, e rankan evelato plega dindan eur zamm pounner a zismegans hag a c'hlaç'har. Pa glaskan sevel, e lammit varnhon evel eul leon kounnaret hag e tigassit d'in tourmantchou estlamuz. Ah ! perak n'oun-me ket maro en eur c'henel hag araok m'en doa den paret he lagad varnhon ! Euz a gov va mam e vijen eat d'ar bez, evel pa ne vijen ket bet. Brëma, pa ne jomm nemed nebeud derveziou d'am dispartia dioc'h ar bez, lezit ac'hañnon da denna va hñlan eur pennadik, araok distrei da vro an denvalijen, el leac'h ne deus nemed liou ar maro. »

Setu penaoz e komze Job. Bro al Limbou, el leac'h ma tiskenne an ençou goude ho maro, bro ag a zeblante dezha ken digonfort ha tenval evel an noz, el leac'h ma zoa kement a vlaveziou da dremen da c'hortoz ar Redamptor promettët, ar vro-ze, pe ar prizonn-ze a zeblante dezha kalz doussoc'h eget an douar-ma trempët gat he zaëlou.

E leac'h gounid he vignouned, he gomzou ne rejont nemed ho lakaat da egari muioc'h-mui. Sophar a ioa he dro da barlant. Goulen a ra digat Job, evel eun den divergont, ag aoualac'h eo kaozeal epad pell amzer evit kaout rezoun ha bernia geier evit lakaat an adversourien da devel. « Var da veno, emezha goudeze, e zoud dibec'h dirak Doue hag e kredes e zeo direbec'h da gomzou. Hogen, ma teuffe Doue da zispaka dirazhomp ar misteriou a zalc'h kuzet en he furnez, e velfez aoualac'h e maoud pell dioc'h beza punisset ervez m'oa dleet. A ne c'houzoud-te ket n'eo ket bet lakeat e galloud

an den kompren petra eo Doue, brassoc'h eget an douar, ledannoc'h eget ar mor hag a vel he lagad dibikouze fougeou an den hag he fallagriez ? »

Goude beza esseat, evel he gonsorted, diskuez sklear da Job oa eun torfetour, eb digass an disterra testeni en he enep, e c'halias anezha da anzao he bec'hejou da Zoue, ha Doue var gement-se en dije pardonet dezha hag her lakeat er stad m'oa araok.

Job a roas dezho disprijans evit disprijans. « C'hui eta, emezha, a zonj deoc'h n'eus nemedoc'h a dud fur var an douar, hag e kredit marteze e varvo ar furnez ganeoc'h. Me a c'hoar kement a c'hui hag, eun deiz, Doue a rebecho deoc'h beza klasket ober goap euz an den just. »

Neuze en hem laka e tro da ziskar ho falz lavarou. « A n'eo ket sklear, emezha, e vez teltou al laeron leun avechou a binvidigez epad ma mañnt troet a enep Doue ? »

« C'hui a gount d'in lavarou an dud koz. Mez peger fur bennak e c'helfe beza an dud koz, Doue a zo treac'h dezho ha Doue ebken a zo fur. N'euz nemetha o c'houzoud perak e kass ar boan d'ar re fall ha d'ar re vad ; perak e tenn avechou ar furnez digat ar varnerien, ar galloud digat ar rouanez, ar zantelez digat ar veleien hag an deskadurez digat ar re goz ; perak e taol dismegans var ar brinsed ; perak e saope e pil broiou ; perak e laosk ar mistri en entchou treuz, e leac'h ma klaskont digor, evel tud vezo, e kreiz an denvalijen, eb en hem gaout var ho zu.

« Me a vel an traou-ze hag a glask kompren perak e za an traou en tu-ze. Setu perak e pedan an

Holl-Galloudek da gaout ar vadelez da rei d'in sklerijen. Evidoc'h-chui, micherourien ar gaou, ne brezegit nemed kenteliou faoz. Mar fell deoc'h tremen evit tud fur, e raffec'h mad prena ho kinou. Daoust ag ezom en deus Doue e teuffec'h d'hen difenn dre ho keier? Alvokaded digoustians, a c'hoant o c'heus da blijout da Zoue en eur ober drouk d'in-me? pe otramant, a sonjal a rit trompla an Aotrou Doue dre ho komzou faoz? Doue he unan ho parno evit beza klasket hen difenn en eur fessoun disleal hag ho kountadennoù a ielo da netra evel eun dornad poutren. Tavit eta ha lezit ac'hanon da lavaret a vouez uhel ar pez a zo em spered. A pa dleffe Doue va feurgass d'an traon, m'en hem zifenno outha. Me c'hoar n'eo ket deuet mad dezha an *hypocrit*; mez me ne meus nep aoun. Mar plij gatha va barn, e zoun sur da veza kavet just.

« O va Doue, tennit divarnon ho tourn ker pounner ha delivrit ac'hanon euz ar spoùnt a meus rag ho kalloud. Galvit ac'hanon ha me a respounto deoc'h, pe otramant me a gomzo ouzoc'h ha c'hui a respounto d'in. Roit d'in da anaout va fec'hejou; lavarit d'in e pe boent e meus manket. Perak kuzet ho pizaj ouzin ha beza kriz evidon evel evit eun adversour? Perak goall-gass eun delien zeac'h a ia gat an avel? Skriva'rit em enep goal varnedigez ha felloud a ra deoc'h va c'holl evit pec'hejou va iouankiz. Evessaat a rit oc'h kement a ran, bete zo-ken oc'h roudou va zreid. »

« Ha setu e koezan e breinadurez, evel eur guiskamant krignet gat an amprevaned. Ouspenn-ze, an den ganet euz ar vaouez, a vev nebeud amzer, e kreiz poanniou a ne elfet ket da niveri. Genel a ra

ha mont a ra kuit, evel bokedou ar parkeier, evel eur skeuden skanv; hag e zeo a enep an netraik-se en hem zavit ha me eo a boursuit didruez? An den a zo diskennet euz eur vammen a n'oa ket neat. Piu hen nettaï nemedoc'h? He zerveziou a zo ber; he vlaveziou a zo niveret. Lezit anezha eta da ehana eun nebeud, ken na deui deiz an delivrans. Ar vezen, goude ma vez troc'het, a ell gladeri hag ober kalz brons. Hogen, an den eur vech maro, henvel ouz eul lenn ag a dec'h anezhi an dour ne zistro ket d'ar vuez. Mont a raffen a greizkaloun da guzet d'al Limbou, da c'hortoz ma vezo torret ho puanegez, mar plichfe ganeoc'h merka d'in an deiz ma o pezo sonj ac'hanon. Mez, eur vech c'hoaz, an den maro ag hen a c'hell distrei da veo er bed-ma? Oh! neuze me c'hortorzfe eb enkreiz an heur ma plichfe ganeoc'h astenn d'in ho tourn. Mez, nan: c'hui a zell piz oc'h kement a ran ha ne bardonit d'in an drouk a ran, pegen dister bennak e ve. Ar menez, abalafin, a vez diskaret; ar garrek a vez taolet er strad; ar roc'h a vez toulet gat eur veraden zour hag an teven a rank ober plass d'ar ganol. Evel-se e kuez a nebeudou esperans an den. No c'heus er starteat nemed evit hen diskar hag hen dougen, goude eur vuez a anken hag a boan, d'ar vro tenva-ze, el leac'h ne ouezo ket memez petra vezo deuet he vugale. »





V.

EIL ABADEN.

Diviz kenta en doa bet gat he vignoured, Job en doa diskuezet dezho sklear aoualac'h e zoa reuzeudik, evit guir, ha gouskoude divlam dirak Doue ; hag ouspenn e zeus eun niver a dud ag a dro pep tra mad evitho daoust ma zint tud fall. Ar virionez a ioa gat Job ; hogen petra ell ar virionez var dud aheurtet en ho zantimant ? En eil diviz, mignoured Job a oue rustoc'h c'hoaz eget diagent. Eliphaz, drouk braz ennh, a rebech da Job ne deus gatha nemed komzou goull ; kass a ra ar beden da netra ; deski a ra ar blasfemou a enep Doue hag erfin en hem lakaat a ra furroc'h eget ar re goz ha zoken eget Doue he unan. Pa ne deu ket Doue d'he zikour, n'eo ket diez gouzoud perak. Divergont eo ouz Doue hag he gomzou a zo fall. Goudeze, e sko adarre var Job, var digarez m'en doa Job lavaret oa direbech.

« Daoust, emezha, ag en a zo eun den ag a c'hell en hem lavaret divlam ? Map an den ag hen a c'hell en hem lavaret just ? E touez sent an Aotrou Doue n'euz ket unan a ne c'hell beza diskaret hag an Envou n'int ket neat aoualac'h dirak he

zaoulagad ! Petra da lavaret eta euz an den sotret, diskaret, a lounk ar pec'hed evel an dour ? »

Petra' rea ar c'homzou-ze da Job ? Ouspenn kant guech, hen doa lavaret n'euz ket eun den parfet dirak Doue. Hag anzaop a rea en devoa great pe-c'hejou dister en he vuez ; mez avad n'hen devoa great torfed ebéd.

Goudeze Eliphaz a zizlavar Job varibouez an dud fallagr a veler peb tra e vont da vad etre he daouarn er bed-ma.

— Setu ama ar pez a lavar ervez kount'chennou ar filosofed koz :

« An den fall a c'houez gat an ourgouill, bemdez epad he vuez : Hogen diez e ve lavaret an niver euz he vignoured. N'hen deus nemed nebeud. Tintal a ra en he skouarn iouadennoù spountuz ; ne vel a bep tu nemed trapou, nemed klezeier hag eun denvalijen ken teo ma na c'heller ket dont er meaz anezhi. Aoun hen deus na vankfe dezha bara ! Guelet a ra e c'houlaoù evitha an dervez fall. Sevel a ra enkreiz varnha evel var eur roue ag a dle antronoz mont d'ar brezel.

« He zourn hen deus astennet a enep Doue ; en hem zavet eo a enep an Holl-Galloudek. En enep Doue eo eat, huel he benn, ha guisket mad. He zremm a ioa ruz-flamm. Lard oa ha krenv. Sevel a rea, e leac'h paleziou dismantret, tiez euz ar re gaerra.

« Hogen he eürusted n'oa ket griziennet mad. He zanvez a zo teuzet. Tan an Env en deus distrujet he vugale. Eur c'hoezaden diveza euz an Aotrou Doue her c'hasso da netra. En dizesper em, abalamour ma kred ne ket goest d a baea evit he

bec'hejou. Mervel a rei araok he oad, evel ar vinnien a varv he bronsou, evel ar vezen olivez a zistag diouthi he bokedou. He famill a ielo da netra ; an tan a rosto he deltou. Setu penaoz an den fall, an den fallagr, pa ra an drouk, pa ra eun torfed bennak, a denn varnha reuziou estlammuz ! »

N'oa ket gaou penn-da-benn, ar pez a lavare Eliphaz. Gouskoude ar pez en devoa lavaret Job a jomme bepred guir. Ne ellet ket lavaret e vije Job eur pec'her braz abalamour ma zeo goal gasset er bed-ma.

Skuiz maro gat he vignoured digaloun, Job ho fedaz da baouez ho frezegennou : « Ma vijec'h em leac'h-me, emezha, me a c'helfe ive ober deoc'h diskourzou kaer ; me c'helfe ive ober eur zell a druez, hag ho koapaat. »

Kemeret a ra neuze Doue da dest ne deo ket eur pecheur. Ne jomm gatha ken mignoun nemed Doue.

« Er stad a zienez ma' maoun, emezha, ar roufennou euz va zal a zoug testeni em enep ; ha va c'horfik paour uzet a zo ive eun test a enep d'in. Lavaret e ve e skrign Doue he zent ouzin ha n'hen deuz evidhon nemed lagad du, sellou du. Va inmiéd a ro d'in stavajou a forz hag a c'hoarz pa velont ac'hanon e poan. Rak an Aotrou Doue eo hen deus lakeat ac'hanon en ho galloud. Hen eo en deus tennet diganen va danvez ha lakeat ac'hanon a bastellou. Gat he virou hen deus treuzet d'in va c'hostou hag hen deus great gouli var gouli. Neuze e meus kemeret eur c'houriz-reun, e meus goloet va fenn gat ludu ha kement ouelet ma zeo va diou jod koenvet gat an daelou ha va daoulagad

tenvaleat. An holl boaniou-ze a zo kouezet varnhon, eb ma vije va dourn koupabl ha d'ar mare zo-ken ma kassen bete Doue pedennou kalounek.

« O douar ; na evit ket va goad, na vouguit ket va hirvoud. Euz ar pez a lavaran ama, e meus eun test en Env, eur goarant dreist ar bed-ma. C'hui, teodou flour, a ra goap ac'hanon-me. Hogen va daelou a bign bete Doue, beteg an Doue-ze a bedan brema da ziviz ganhen evel eun den gat eun den all.

« Mall eo ; rak va dervezioù a zo e vont da echui hag e maoun e vont de gerzet dre eun hent a n'eus ket da zistrei ennea. A ben nebeud e tennin va huanad diveza, ha ne jommo mui ganen nemed eur bez. O va Doue, ne meus ket pec'het, ha gouskoude va daoulagad a zo beuzet en daelou. Rentit eta d'in testeni mad. Lakit ho tourn em dourn dirak va inmiéd. Guelit pegen diskiantet eo ho spered ha penaoz e kemeront digarez euz va foaniou-me evit rei da gredi ho frezegennou faoz.

« Va Doue, diskuezit n'oun ket eun den fall hag an dud vad a vezo mantret ; an den divlamm a en hem zavo a enep an den difeiz ; an den just a gendalc'ho gat an hent eeun hag an den a zoujans Doue a zalc'ho mad. »

Job ne c'hortoze ken sikour nemed digat Doue. Ar promessaou kaer a rea dezha he vignoured ma kar anzaou he bec'hejou ha goulén pardon, ne dint evintha nemed goaperez ha ravoderez. « Setu me, emezha, dinerzet-tre. Kement a meus c'hoanteat ober a zo eat da netra. C'hui a glask ober euz an noz-ma deiz ha va lakaat da c'hortoz ar sklerijen e kreiz an denvalijen spountuz ! Kaer am euz gortoz,

gulet a ran er-vad e tiskennan bemdez varzu ar bez. Eno e savan va goele hag e lavaran d'ar vreinaadurez : « C'hui eo va zad. » Ha d'ar prenved e lavaran : « C'hui eo va breudeur ha va c'hoarez. » E pe du eta ema va esperans ? E pe du ema an traou kaer a bromettit d'in ? Disken ha disken a ran atao etrezek ar vro terval, eb gouzoud a me a gavo eno eun diskuiz. »

Pa baouezas da gaozeal, Baldad a zirollas varnha gat eun toullad rebechou, abalamour ne fell ket da Job anzaou ne deu morse ar boan nemed da heul ar pec'hed, mar kav guelloc'h tremen ar re all evit tud diskiant ha pennou goullou, klemm hag hirvoudi eb ehan evel pa dleffe ar bed-ma-holl mont d'an traon d'he heul. « Kaer en devezo Job lavaret, lampr an den dizoue a vezo mouget, an tan en he oaled a varvo hag he delat a vezo en denvalijen. He dreid a vezo hualet ; he vennoziou diskaret ; paket e vezo er roued. Sevel a rei varnha ar spount : an naoun a deui d'hen dizec'ha ; hag ar c'hlenved, kannad trist ar maro, a grigno he eskern. Tennet e vezo digatha ar madou a ioa leiz he delat hag ar maro, rouanez gallouduz ha didruez, a vresso anezha dindan he zreid. Neuze, e teuo tud, a-zianveas-bro da gemeret telt an hini a zo eat kuit. He c'hriziou a zec'ho, he skourrou a varvo, ankounac'heat e vezo hag he hano zo-ken ne vezo ket klevet. N'hen dezo var an douar-ma na map, na kar, nak heritour. Pa glevint peger reuzeudik eo, an holl a vezo brema strafillet hag ar rumm dud a deui varlec'h a vezo mantret ive. Setu a-ze, eme Baldad, petra' zo e c'hortoz an den fallagar. »

Pa gomze Baldad evel a rea, en devoa a vel Job, kollet gatha he zanvez, he vugale, he iec'hed ha beteg he hano. Sonjal a rea edo ar c'heaz den lorze e vont da zisken er bez.

Job ne c'hellas ket miret da ziskuez dezha pege-ment a boan o doa great dezha he gomzou : « Epad pegeit amzer c'hoaz, emezha, e teuoc'h da derri d'in va fenn gat ho tiskourzou sot ? Setu ama d'an nebeuta an dekved guech ma teuit da ober disme-gans varnhon. Ker rust oc'h evidon ma tlefec'h ruzia gat ar vez. Var digarez ma zoun ankenniet, en hem zavit em enep evit va zamall. Mad ! Me' lavar deoc'h hag her lavaro c'hoaz, mar doun goall gasset gat Doue, ne d'eo ket evit paëa d'he justiss. »

Eur vech c'hoaz, evit ma kemero he vignouned eun nebeud truez outha, e lavar dezho e ber gomzou he boaniou hag he anken. An Aotrou en deus stanket an hent outha a bep tu ; ne ket evit mont larkoc'h. Tennet en deus digatha he c'hloar ; diskaret en deus he gurunen divar he benn. Hen dis-c'hrizienna hen deus great, evel eur vezen pilet da deuler en tan. Al laëron a zo lammet var he delatou ; he vreudeur o deus hen dilezet ; he revelien a zo tec'het kuit ; he groc'hen n'eo mui nemed eur gouli var relegou dizec'het. « O pezet truez ouzin, emezha, c'hui da vihana, va mignouned. Rak skoet oun gat dorn an Aotrou. Goal-gasset oun gat Doue. Kement-se holl a ne ket aoualac'h, ma klas-kit ouspenn kreski va foaniou dre ho rebechou diskiant ha c'hoero ? »

He vignouned ne reont van evit he glevet ha chomm a reont evel tud dilavar.

O velet kement-se, Job a zao evel drouk enha ha gat eur vouez krenv ha sklear e lavar : « Salo e ve ar c'homzou e zan da lavaret merket mad en eul leor, pe kizellet var ar mean, pe skrivet var eun daolen bloum gat eur bluen dir ! »

An tri gamarad ne ouient petra da zounjal. Petra' lavaro an den-ma a zo eat he spered digatha ? Ne c'hedent euz he'berz nemed rebechou, komzou rust, diskiant, ha blasfemou. Piu a oue mantret pa glevchot Job e lavaret ar c'homzou kaer-ma : « Gouzoud a ran e zeo beo va Redamptor hag e teuin euz a galoun an douar en deiz diveza. Eur vech c'hoaz e vevin em c'horv, ha dindan ar me-mez kroc'hen e velin va Doue. Her guelet a rin. Va daoulagad a baro varnha ha varnha he unan. Setu an esperans a zo hag a jommo e goeled va ene. »

Kaerra kentel evidomp-holl ! Mignouned Job ne fell ket dezho kredi ne ve ket eun den fall. Job a bed Doue d'he varn er bed-ma, ha Doue a ra ar skouarn vouzar. Neuze e c'houlén da vihana ma vezo barnet er bed-all. Ar maro, emezha, a zo erru varnho ; hogen va c'horv a deuio euz a varo da veo. D'ar varn diveza, pa vezo dastumet an holl dirak tribunal Doue, Doue a vezo mad evitha. Bre-ma, evit guir, en deus poan en he gorv paour ; hogen ar c'horv-se a vezo eun deiz leun a c'hloar ha gat he zaoulagad, pikouz brema, e velo Doue. An esperans-ze a ro kement a nerz d'he galon ma n'hen deus mui nep aoun na rak dismegans an dud na rak ar boan a elfe da zigass dezha c'hoaz an Aotrou Doue.

« Paouezit, va mignouned, emezha, da rei d'in kement a neac'h evel ho c'heus roet betek-hen, ha

ne glaskit ket kement a zigareziou evit va zremen. evit eun den fall. Diouallit mad ouz kleze an Aotrou ; ouz ar c'hleze-ze a sko var an dud disleal ; ha sonjit er-vad e zeus evit an holl eur varnedigez. »





VI.

TREDE DIVIZ.

DOB en doa skoet just ha lavaret guir. Divezatoc'h e vezo guelet sklear pe hen a zo koupabl, pe hen a zo divlam. Rak Doue ne ket er bed-ma ebken eo e varn an den, hag e ro dezha punision pe rekompans, hogen, er bed all e c'hell ouspenn rei da bep hini ervez he oberou. Rak petra eo ar bed all nemed eun astenn euz ar vuez-ma ? A tamall a c'heller eta Doue a injustiss evit beza digasset kalz poan da Job er bed-ma, pa dle rei dezha kaerroc'h rekompans er bed all ? Kent-a-ze, daoust a poaniou Job a ve eur merk e zeo eun den fallagr ?

Red eo gouskoude anzaot o devoa an dud, en amzeriou kenta, poan e kredi ar guirioneziou-ze. Hor Zalver n'en doa ket c'hoaz dispaket ar misteriou euz ar vuez da-zont. Hen a dle dont da zigeri porz an envou. Hogen, ped mil bloaz e vezor c'hoaz var c'hed dezha ? Den n'her gouie. Gouskoude, da c'hortoz ma teui ar Messias da drec'hi Satan, an den a ranke, pa zea euz ar bed-ma, koeza el Limbou, el leac'h a denvalijen hag a dristidigez. Eno, disparti diouz he gorv, an den n'hen devoa mui nemed evel

ar skeud anezha he unan. Setu perak e sonje dezho e tlie Doue punissa pe rekompansi er bed-ma, er memez fesson ma rekompanso ha punisso er bed-all.

Hag oc'h penn-zo, daoust a Jehovah ne bromette ket d'he bobl bennoz pe valloz er bed-ma, dioc'h ma vije troet Israel ?

Setu petra' roe da gredi da vignoured Job e ranke beza eur goal bec'her pa zoa ker goall-gasset gat Doue. E ranke malloz Doue beza koezet varnha ! Job, he unan, ne ma ket eb nec'hamant e goueled he galoun.

Divlam eo. Perak eta e teu Doue da vernia varnha kement a boaniou ? Setu perak e ped Doue d'he varn araok ma varvo evit ma vezo lakeat ar virionez sklear ha splam dirak an holl.

Kaer en devoue Job lavaret, ne c'hounezas ket he vignoured koz. Diagent hen devoa diskuezet dezho, sklear aoualac'h, e c'hoarvez aliez er bed-ma, guelet tud fall, tud fallagr, ne ket ebken dibistik, mez sammet a vadou gat Doue. Eun dra oa a na c'hellet ket nac'h. Petra' ra Sofar neuze ? Skei a gostez ha diskuez n'eo bet morse padet eürusdet an den fall.

« An den fall, emezha, a glask en hem zavel betek an env ; mez Doue a skub anezha evel eun tam teil. He eürusted a dremen evel eun ure. Tec'het a ra, ha ne veler ket zo-ken e pe leac'h edo araok. He vugale a vevo en dienez. Dizurziou he iaouankiz a ielo dre he eskern hag a gousko gatha er boutren. Tanveat hen deus an drouk ha kaout a rea gantha blaz-vad. A nebeudou hen deus her lakeat da dremen dre he c'houzoug evit kreski he

blijadur. An drouk-se, evel eun ampoezon treitour, en hem zil beteg he gostou. Sunet hen deus bilim an aspiq ha gantha e varvo.

« Evitha, ne redo mui goaziou leaz ha mel. Paet e vezo evit an holl drouk hen deus great. En eur laerez ar paour, hen deus kasset he di d'an traon. Na gave ket dezha en devije morse aoualac'h ; ar pezh hen devoa a ielo da netra ha ne jommo ket gatha zo-ken eun esken vara. Doue a laosko varnha an tan euz he goler. Mar gell tec'het diouz ar c'hleze, e vezo tizet gat ar ouarek. En dro dezha e savo tenvalijen ha rostet e vezo gat eun tan a ne vezo ket bet c'hoezet gat eun den. Mervel a rei en he delt, e kreiz an anken, dilezet gat an holl. An Env a zizoloi he dorfejou hag an douar en hem zavo en he enep. Deiz koler an Aotrou, e vezo dis-c'hriziennet he famill.

« Setu a-ze ar pezh a brepar Doue d'an den fall. Setu an heritaj a lez gantha. »

Pa vel Job he vignouned dibarket hag eat a-biou d'ar virionez, e za dezho a zrevi hag e tiskuez dezho freaz pegen diskiant int.

« Selaouit piz ac'hanon, emezha, ha goudeze e c'hoarzoc'h, mar kirit, euz ar pezh a mezo lavaret. Setu ama eun dra a ne ouzoun ket hag am beffe c'hoant da zeski ganeoc'h : « Perak eta e zeus er « bed-ma tud fallagr ? Perak int-hi savet huel ha « karget a zanvez ? En dro dezho e velont torrajou « bugale ha bugale vihan. Ar peoc'h a ren bepred « en ho zi ha guialen Doue ne sko ket varnho. Ho « loened a ia var gresk. Ho bugale, dre ar mezicu, « a lamm, a zans, a gan hag a c'hoari gat muzi- « kou. Tremen a reont ho buez er blijadur ha dis-

« ken a reont er bez eb enkreiz. Setu a-ze, gous- « koude, tud a n'ho deus ket paouezet da lavaret « da Zoue : Tec'hit diouzomp. Ne gerzimp ket dre « ho kourc'hemennou ? Petra eo an Holl-Galloudek « evit ma renkimp-ni, he zervicha ha perak e teuf- « femp-ni d'he bedi ? » Setu a-ze kalounou fall a dud ha gouskoude ho daouarn a zo leun a binvidigez !

« C'hui a lavar d'in-me n'eo ket paduz eürusted an den fall. M'her goulén ouzoc'h. Ped a elfec'h henvel d'in hag a ve bet mouget ho lampr gat Doue araok ar mare ? ped, c'hoaz, ag a ve tec'het ho danvez a dre ho daouarn, evel ar boultren en eur gorventen ?

« Lavaret a rit c'hoaz : « Doue a skoio ar vugale « abalamour d'an-tad. » Mez perak Doue ne sko ket dioc'h-tu an tad ? Neuze e c'helfe gulet gat he zaoulagad he unan he diegez diskaret ha tanva gat he vuzellou ar c'halir c'hüero hen deus mesket. Petra' ra-ze dezha petra' deuio he di da veza, na pa ve diskaret, pa ne vezo ket mui euz ar bed-ma ?

« Va Mignouned, a felloud a ra d'eoc'h, mar plij, deski d'an Aotrou Doue kass ar bed-ma en dro ? Mad ! A ne velit ket unan maro e kreiz he vrud, pinvidik, eüruz ; hag eun all ive maro en he amezeg, paour hag en dienez ? Er memez douar e mañt e loja hag o daou int drebet gat ar memez prenvred. Kaer oc'heuz facha, kaer eo deoc'h goulén e pe leac'h ema an den-ma, an den-ze, tud fall, me ne meus ken nemed lavaret deoc'h an dra-ma : « Goulennit digat an dremenidi ; hag hi a lavaro deoc'h ive, kredapl braz, evel-d'hon-me, e vez, si-

ouaz an den fall re aliez espernet er bed-ma. Doue ne sko ket varnha. Pa vezo great gatha he dalarou, e vezo douget d'an toull. Eur bez kaer hag a briz a vezo great ha savet araok he varo. An douar a zeblant skañv evitha, etre ar re a zo bet araok hag ar re a ziskenno var he lerc'h. »

Elifaz ne ouie petra da respount. Mez drouk spountuz a ia eñnha hag e lavar : « Perak e tigasfe Doue poan d'he vignoured ? Ag hen digass a raffe evit ho renta santelloc'h ? Assa-ta ! Daoust ag an Aotrou Doue a denno eur profit bennak euz hor vertuziou-ni ? »

« Ag hen digass a raffe evit miret ouz an den da noazout dezha dre ar pec'hed ? Mez da biou e ra drouk ar pec'hed, nemed d'an hini her gra ? Ne deo ket eta na dre interest, na dre spount, hogen dre justiss eo e ra an Aotrou Doue ar pez a ra. Pa sko var unan bennak, e zeo abalamour ma hen deus manket da Zoue. Mar deus kouezet, emezha da Job, kement a drubuillou, e zeo abalamour e zoc'h eun den fall ha zo-kén euz ar re falla a elfet da velet. »

Neuze Elifaz, penn-follet, a laosk peb seurt geier a enep Job.

« Derc'hel a reaz ho gajou oc'h da vreudeur ; diviska a reaz an dud keiz : ne roez ket eun tam bara d'an dud ezomek. Laerez a reaz douarou da amezein. Kass a reaz kuit an intañvezet paour, ha d'ar vugaligou emzivad e torrez ho divrec'h. Setu perak oud paket evel e kreiz eur roued, er boan hag en anken. »

« Te, marvad, a zonje did e zoa Doue savet re huel dreist ar c'hoabr evit gullet da oberou. Evel

an dud fall a ioa bet lonket gat an dour diluj, te a lavare da Zoue : « Teac'h diouzin ; ne meus aoun ebed razoud » ha gouskoude e teu peb tra digatha. An diskar a zo deuet ; an dud vad a zo laouen-abalamour e zeo pilet ho adversour ha kasset he diegez da netra.

« Distro eta varzu Doue hag e kavi-adarre ar peoc'h. An aour hag an arc'hant a goezo en da di ; Doue a zelaouo da bedennou hag a roi did kement a c'houlenni. Ishel oaz ; mez savet e vezi uhel. Rak Doue a c'hoar sevel ar re en hem c'hra dister. »

Pegement bennak eo goapeat, Job ne lavar ger. Sulvui oar kriz evintha, sulvui eo douss. Elifaz a zo e paouez ober dezha a bep seurt rebechou sot ha disleal. Job a gemer Doue evel test n'eo ket kundeduet ha gouarnet ar bed gat he Broidans, ervez kreden ha lavar he vignoured.

« Diviz a raffen, emezha, gat Doue mar gelfen pignat betek he dron ha n'e ket traou a vankfe d'in da lavaret dezha. Ha ma ne ven ket evel bruzunet raktal dirazha, a dra-zur, va c'homzou a ve kavet mad ha fur. Hogen e pe leac'h kaout Doue ? Kaer a meffe mont e tu ar sao-heol, e tu ar c'huz-heol, a gleiz, a zeou, n'her c'haffen e nep leac'h. Gouzoud a ra petra oun bet. Va c'hasset en deus evel ma vez an aour teuzet er fourniez. Dre he hent e meus kerzet atao eb distrei ; morse n'e meus torret he c'hourc'hemennou. Heuliet em eus bepred he volontez. Ha gouskoude !.... Mez hen eo ar mestr ; ar pez a blij gatha a ra, ha den n'en deus galloud da viret outha. Evidon-me e rei ive eta evel agaro, evel ma zeo kustum da ober evit an holl draou. »

Job n'hen hem zao ket a enep bolontez Doue.

Mez, evelato, pa zoa dibec'h perak oa deuet da vru-
zuna anezha dindan he dreid ? Eur mister eo ag a
zo dreist he skiant hag a ra dezha, var a lavar,
kalz muioc'h a boane eget kement drouk a zo dioue-
zet gatha. Klask a ra koumpren perak e chomm
justiss Doue evel mor-gousket er bed-ma, petra
bennak ma lavar he vignouned n'eo ket guir ke-
ment-se.

« Tud a zo, emezha, ag a ziblass ar mein harz, a
gass da beuri en ho zachennou loened laeret ga-
tho. Laerez a reont digat an emzivad he azen, di-
gat an intañvez-he-ejen. Kass a reont divar ho hent
ar paour hag an den ezomek. Lod all, evel an azen
gouez er gouelec'h, a zo mintin-mad var zao e
klask ho freiz ; medi a reont e park ho amezek ha
distaga' reont ar rezin diouz he vinien ; ar beajour
a laeront, a lakeont en noaz da greñvi gat ar riou
e kreiz ar menez. Er c'heriou, muntrez ! An dud
a glemm ; ar re a zo glazet a gri a bouez-penn....

« Doue gouskoude a lez an torfejou-ze digastiz !

« Tud a gaver ag o deus aoun rak ar sklerijen.

« En denvallijen e reont ho zaoliou fall. Ar mun-
trer a zao da c'houlou-deiz evit mont d'he labour.
Laza ha laerez a ra kement a gav. An ozac'h li-
bertin, evit mont en tiez fall, a c'hortoz tenvalijen
an noz. « Brema, emezha, den na vel ac'hanon. »
Ar goulou-deiz a zo evitha evel skeud ar maro, hag
an devalijen a blij dezha kement a ma plij ar skle-
rijen d'ar re-all.

« Eb douetans ebed, an dorfetourien-ze, a dleffe
koeza an holl malloziou var ho c'hein, lakeat d'ar
maro ha stlapet en ivern. Ia ra vezint lakeat d'ar
maro eb truez, ra vezint drebet gat ar preñved ; ra

vezint bruzunet evel eur vezen dizec'het ha na ve-
zo mui menek anezho !

« Mez nan : Doue a ro amzer dezho c'hoaz da
ober pinijen ha ne ra nemed kreski ho ourgouill.
Hogen Doue a vel ho oberou. Abalafin, goude beza
bet savet huel, int diskaret gat ar maro koulz hag
holl bugale all an dud, evel ma vez diskaret ar pen-
nou ed en eost.

« A n'e ket a-ze ar pezh a velomp bemdez ? Pe-
hini ac'hanoc'h a gredo lavaret e zeo gaou ke-
ment-se ? Piu a damallo ac'hanon dirak Doue ? »

Mignouned Job n'e gavent abek ebed en he gom-
zou.

Baldad a zistagas eur bomm bennak divar benn
galloud an Aotrou Doue goest da lakaat var zao
gat eur gomz eun niver a zoudarded, ha var he
zantelez. Rak dirazha netra n'eo dinam, zo-ken
eal an Envou ha nebeutoc'h c'hoaz an den, preoñik
ganet er vouillen.

Job a respountas dezha n'oa ket ber aoualac'h a
spered evit kaout ezom euz he genteliou ha zo-ken
m'ar doa red, oa goest da gomz euz an aotrou
Doue koulz, d'an nebeuta, a Baldad. Setu kerkent,
e tispak dirak he zaoulagad ar burzudou great gat
holl galloud an Aotrou : Ar jeanted beuzet en dour-
diluj ; an douar ploum en he zao eb beza stag e nep
leac'h ; an dour prizouniet er c'hoabr ; ar menezioù
e krena var eur sin euz an Holl-Galloudek ; ar mor
e terri dirazha he gounnar hag an envou e tispaka
ho gened. « Ha kement-se, emezha, n'eo nemed eul
lodennik euz he oberou, eun trouzik skañv euz he
vouez ponner : Petra've'ta ma kleffec'h he gurun ? »

An tri zen koz a roas peoc'h.



VII.

GER DIVEZA AN DEN TAMALLET.

Da velas oa treac'h d'ar re all, Job a fell dezha diskuez dezho gat muioc'h a nerz c'hoaz e zoa direbech he vuez. « Kemeret a ran da dest, emezha, an Doue Galloudek a ra d'in eur vuez ker c'huerdo ha ne fell ket dezha va barn, biken epad ma vevin, gaou na dremenno dre va muzellou. Ne ellan ket kaout mad ar pez a rit d'in ; ha pa zoun tamallet e gaou, eo red d'in en hem zifenn betek ar maro. Rak va c'houstians ne ra ket d'in an disterra rebech. »

Neuze e ra e ber gomzou eun distro var ar pez a zo bet lavaret var gount ar Providans divar benn an dud vad hag an dud fall. Diskuez a reas sklear d'he vignouned ne c'houient netra var benn Providans Doue. Int-hi a zonz dezho e zeo den fall abalamour Doue en deus digasset dezha kalz poan. Mez diskuezet en deus dezho sklear e tigass Doue ar poaniou koulz d'an den mad ha d'an den fall. Ouspenn-ze, hen tremen a reont evit eun den dizacret hag e lavaront dezha evit he gonsoli, e c'hell hirio c'hoaz distrei ouz Doue ha gounid he c'hrassou-mad. « Mez, a lavar Job, pa fell da Zoue

skei var an den fall, eo evit her bruzuna. E pe leac'h ema esperans an den dizoue pa deu Doue da denna he ene digatha ? Doue, ag her selaou a rei deiz an anken vraz ha rei a reio dezha adarre he c'hrassou-mad ? »

« Mont a ran, a lavar Job goudeze, da ziskuez deoc'h petra'zo e c'hortoz an den fallagr. Her gouzoud a rit koulz ha me. Perak eta, euz ho perz, kement a gomzou goulo ? Kalz bugale en deus, an den fallagr ; hogen mervel a reint dre an houarn pe dre an naoun ; berniou aour en deus ; mez rannet e vezint etre re all ; eun ti en deus ; mez kuezare'i en he boull. Ar maro a zaillo varnha evel eur barr avel ha Doue, didruez outha, a laosko varnha eur bir a ne c'hell ket tec'het dioutha, kaer en dezo galoupat. En deiz ma vezo diskaret an dud astrako ho daouarn ha dont a reint da zutal var ar bez.

« An den, emé Job goudeze, a denn euz kaloun an douar an houarn, an arc'hant, an aour, ar mein kaer. Hogen, e pe leac'h kaout ar furnez ? E pe leac'h ema ar skiant e chomm ? An den ne oar ket pegement a dal ar furnez. Ne gaver ket anezhi var an douar-ma. N'ema ket ganen-me, a lavar goeled an douar ; na ganen-me a lavar ar mor doun. Ne eller he frena na gat aour an Ophir na gat mein kaer an Ethiopii.

« Euz a be leac'h e teu eta ar furnez ? hag e pe leac'h e chomm ar skiant ? Kuzet eo oc'h daoulagat an dud ha laboussed an Env ne ouzont ket e pe leac'h ema. Doue ebken a anavez he roudou ; Hen ebken a c'hoar e peleac'h ema e chomm. Rak he lagad lemm a vel beteg ar penn pella etz ar bed. Pa roas ho lezen d'an avel ha d'ar glao ; pa verkas ho

hent d'al luc'hed ha d'ar gurun, e velas ive ar furnez, e velas anezhi penn-da-benn hag e lavaras d'an den : « Douji da Zoue, setu ar furnez ; pellaat diouz an drouk, setu ar skiant. »

Kement hini eta en deus c'hoant da veza fur a dle beva e doujans Doue, pellaat diouz ar pec'het ha lezer Doue, ar furnaz memez, da gass anezha dre an hent a blijio gatha. Aoualac'h en devoa lavaret Job hag en dije great mad paouez goude ar c'homzou-ze evel m'hen doa great en deiz m'oa digasset dezha kement a geleier fall an eil var-lerc'h egile. Mez a forz d'hen tamall, he vignouned her lakeas d'en hem jala. Ne ouie ket perak ne vije ket deuet Doue da ziskuez oa divlamm ha dibec'h pegement bennak n'elle ket an dud her c'houmpren.

Etretant, e teu da zont Job euz an deizioù eüruz ma serviche Doue a greiz kaloun ha ma re-seve digatha rekompans kaer evit he garantez. « Piou a rei d'in-me, emezha, distrei var va c'hiz, d'an amzer dremenet, d'ar mare ma zoan diouallet gat Doue hag hentchet gat he sklerijen ! » Seblantout a rea dezha neuze guelet en-dro dezha he vugale muia karet, ar mevelien a ioa en he zervich hag an niver a loened a beure en he barkeier. Seblantout a rea dezha beza e touez an dud koz a zente outha abalamour e zoa ker fur an aliou a roe pe c'hoaz e kreiz an dud glac'haret a gave atao digatha sikour. Siouaz ! Eat oa a-biou an amzer gaer-ze !

« Brema, emezha gat glac'har, oun goapeat gat an dud iaouank, gat bugale tadou a ne mije ket kemeret e touez chass al loened, dre na ellent ober an disterra vad. N'ho devoa ken magadurez nemed

ar grizioù c'huero a gresk e touez ar strouez na ken ti nemed goask ar c'herrek ; ouenn dud louz, tud eb hano, amprevaned lor. An dud-se gouskoude ne skuizont d'am goapaat, ha da grainchat oc'h va bizaj. Bounta reont varnon evel tud gouez ha klask a reont va laza.

« Setu me eta evel eun den eat da netra, eb esperans, eb an disterra joa. E douk an noz, ar boan a ia bete mel va eskern hag ar c'hlenved a grign ac'hanon ne gousk morse.

« Ho kervel a ran, o va Doue, ha ne respountit ket. Ho kervel a ran adarre hag e tistroit ho taoulagad. Ennoc'h o c'heus great evidon-me eur galoun dir hag eun dourn houarn. Savet o c'heus ac'hanon huel, ha goudeze o c'heus va stlapet ouz eur garrek. Gouzoud a ran e kassoc'h ac'hanon a ben-nebeud d'ar bez, da lojeiz an holl dud.

« Ah, Siouaz ! Gortoz a rean eürusted hag eo dirollet varnon an anken. Esperout a rean sklerijen hag en dro d'in ne deus nemed teuvalijen. D'an aered oun breur ha mignoun d'ar c'haouenned. Ar c'hroc'hen, var va c'horv, a zo droulivet ha va eskern a zo e leski gat an dersien. N'ellan tenna euz va muzikou nemed soniou truezus, nemed soniou a gaon !...

« Ha petra'meus great a fall evit beza goal-gasset er mod-ma ?

« Great e meus marc'had gat va daoulagad evit pellaat peb sonj fall dioc'h va spered. Petra a raffe d'in eta an Holl-Galloudek ma tiouesse d'in en hem lezer da vont da bep seurt ioulou fall. N'e ket mui eta evit ar pec'heur eo an drouk hag evit an torfe-tour ar maro ? Pe otramant, daoust a Doue en deus

paouezet da velet petra'ran ha dre be hent e kerzan ? A baleet em euz-me dre hent ar geier hag ar fouge ? Ra zeui da boueza ac'hanon e balans he justiss hag e velo mad e zoun dibec'h.

« Mar doun distroet divar an hent mad, ma meus louzet va c'haloun pe sotret va daouarn, me c'houlen e ye drebet gat an estren an ed am eus adet ha guelet e vervel an diveza euz va lignez.

« Mar deus bet biken em c'haloun karantez evit eur vaouez, mar doun bet e troidellat en dro da c'hreg va mignoun, me c'houlen e teuffe an estren em zi ha ma ve dizenoret va greg. Rak eun torfed spountuz eo ag a deu da vouga eienen ar vuez.

« M'am beus reuzet mont dirak ar barner gat va mevel pe va matez, pa her goulennent, ha manket da rei dezho ho guir, Doue ne ve ket just ma ne sko ket kreñ varnhon : rak Hen en deus krouet koulz ar mevel hag ar mestr.

« Mar doun bet rust e kenver ar paour ; m'am beus manket da ranna va bara gat an emzivad (adalek va bugaleach e zoun bet he dad) ; ma meus lezet ar paour da grena gat ar riou eb he viska, eb he domma gat gloan va denved, ha ma meus, var digarez oan mestr, savet va dourn var eun emzivad ebken, me a c'houlen ma vezo va breac'h brunet ha distaget dioc'h va skoaz.

« Oh-nan ! Atao e meus doujet an Aotrou ; ha bet kement a aoun rak he goler evel rak tarsiou eur mor kounnaret. Morse ne meus lakeat va esperans enn aour. Morse ne meus kemeret an heol hag al loar evit doueou da adori. Rak ho adori a zo eur pec'hed euzus. Rak trei kein eo d'an Doue Holl-Galloudek.

« A morse oun bet laouenneat o velet diskaret ar re o devoa kassouni ouzin ? Na bet joa abalamour oa diouezet drouk gatho ? Ne meus ket touet zo-ken a eneb va adversourien. Va zi a ioa digor d'an estren, d'ar beajour. Tud va zi a lavare : « e pe leac'h ema an den a ne ket bet e tribi oc'h he daol ?

« Nan ; n'eo bet morse red d'in kuzet eur pec'hed na ruzia dirak va c'herent na dirak ar bobl, na mont da guzet gat aoun rak an dud.

« Mar sao va douarou ho mouez em enep, ha ma lenv an irvi var va laeronsi, ma meus drebet ho frouez eb ho faea, ma meus glac'haret eullabourer bennak, me a c'houlen ne zougo va farkeier, e leac'h eiz ha guiniz, nemed drez ha spern !

« Setu ar pezh a zo fellet d'in lavaret freaz-Plijet gat Doue va zelaou ! Plijet gat ar Barner-Braz rei d'in ar pezh a meus c'hoant ha va c'hass dirak he dribunal ! Brema ive e c'houlennan ma lakai va inimied dre skrid ar pezh a damallont d'in. Me a lakai ar skrid-se var va diouiskoaz evel eur merk a enor ; m'her lakai en dro d'am penn evel eur gurunen ha me hen dispako ger evit ger e c'harz treid va barner ha dirazha e zin eb aoun, sur da veza guennet gatha penn-da-benn. »





VIII.

DIVIZ ELIU.

ADALEK neuze tri vignoun Job a baouezas da respount dezha, n'e ket ma kredent e vije direbech, mez abalamour ne ouient ket petra da lavaret. Ar gounid a jomme eta gat Job ervez apparans pa deuas da gomz eun den iaouank, hanvet Eliu, map Barakel. Bete neuze n'en doa lavaret ger; brema e teu da damall an eil koztezen hag eben:

« Re iaouank en hem gaven, emezha, evit kemeret perz er c'hrogad diviz a zo bet a-ze entrezoc'h. Me a zonje e devije ar furnez komzet dre c'hinou ar re goz. Hogen, spered Doue eo a ro ar furnez ha n'eo ket ato an dud koz eo a ro ar guella aliou. Selaouet e meus piz kement o c'heus lavaret hag evidon-me ne gredan ket o peffe great an disterra gaou da greden ha da lavarou Job. « Doue, eme-c'hui en deus her skoet ha ne ket eun den. Guir eo. » Job en deus eil-geriet ouzoc'h ha brema ne livirit ger. Me a gomzo eta d'am zro. Rak ne ellan ket miret da lavaret an traou a zo berniet em spered. Komz a rin gat ar virionez, eb damanti da zen. »

Goude ar c'homzou kenta-ze, e troas varzu Job

n'oa ket ken nebeud, ervez he greden, direbech aoualac'h. « Job n'en dije ket kredet diviz gat Doue; mez Eliu a zo eun den eveldha ha dre-se e c'helle en hem zifenn a-zoare, ma hen doa eun dra vad bennak da lavaret. »

Eliu a glask neuze diskuez da Job en doa great fall oc'h en hem glemm oc'h Doue.

« Dibec'h oun ha direbech, o c'heus lavaret dirazon-me; perak e teu Doue da oual-gass ac'hanon evel pa venn he adversour? Da genta, e lavarin d'eoc'h e zeo diaviz ho koulen. Doue, savet ken huel a-zioud an den, n'eo ket red dezha renta kount d'an den euz ar pezh a ra. Ouspenn-ze, Doue meur a vech a ziskuez d'eomp ar pezh a fell dezha; mez ni ne lakeomp ket evez aoualac'h. Aliez guech, Doue a gelen an den epad he gousk, dre eun ure. Lavaret a ra dezha seac'h chainch buez, diskar he ourgouill, nettat he ene ha dre'n hent-se he zave-
tei. Avehou c'hoaz, Doue a zigass d'an den, evel kannad, eur c'hlenved ag a dorr he gorr, a zizec'h he eskern hag he laka var bord ar bez. Neuze mar teu eur c'hannad a-berz Doue, eun eal choazet etre mil, da ziskuez dezha an hent eeun, Doue a zell a druez ouz ar c'heaz den hag a ro dezha ar pardoun. He genta iaouankiz a ro d'ar c'horv-se uzet gat ar boan. Selaou a ra gat madelez pedennou an den hen doa diskaret hag hema a zo laouen adarre abalamour ma zeo mignoun da Zoue: « pec'het e moa, emezha, ha Doue n'hen deus ket va funisset ervez ma tlie hen ober. Va zennet hen deus euz ar bez ha guelet a ran adarre ar sklerijen. » — Setu a-ze petra'ra Doue aliez evit santelaat ha kelen an den. »

Eliu n'ema ket eta a-du gat mignoured koz Job. Ar re-ma a lavare e zeo bepred ar maleur eur bunision. Eliu a lavar e zeo aliez eur groaz a zilvidigez hag aliessoc'h c'hoaz eur remed a enep an techou fall hag ar pec'hed. Kaout a rea dezha n'en doa ket Job guelet sklear aoualac'h ar virionez-se hag en devoa abalamour da-ze en hem glemmet re, bete zo-ken gervel Doue da dest n'oat ket just en he genver. Eliu var ar poent-se a ra dezha rebechou c'huero ha re zo-ken a rebechou.

Dioc'h lavar Eliu n'oa ket bet aoualac'h evit Job lavaret oa divlam, mez tamal a rea ouspen an aotrou Doue dre na roe ket dezha ar pez a ioa dleet ha dre-ze n'oa netra da c'hounid evit an den e c'hober bolontez Doue. » Dre al langaj-se a lavare Eliu, e vlasfeme ker gouaz ag an dud dizoue. Mez morse Job na lavaras traou evel-se. E kreiz he anken, en doa pedet Doue da rei da anaout oa dibec'h evit diskar an dud ourgouilluz a ioa oc'h hen tamall. Mez morse n'hen devoa lavaret e vije Doue injust pe disleal. Poan hen doa e kumpren misteriou providans Doue. Gouskoude, evel ma talc'he bepred da c'houlén beza barnet, e seblante tamal an aotrou Doue da veza douget muioc'h evit an eil eget evit egile, pe da vihana da jomm dizeblant. Eliu a zifenn gat nerz ar Brovidans.

« Arabad, emezha, e vé kredi e zeo Doue drouk pe disleal. Doue a ro da bep hini dioc'h ar pez a ra ha ne varn den eb abek. A neo ket Hen providans ar bed hen deus krouet ? N'hen deus nemed tenna he zourn, ha kerkent ar bed a ia da netra. Doue ne zell ket ouz ar re vraz pe ar brinsed : Ho henvel a ra tud dizoue, tud difeiz ha kass a ra dezho eur

maro subit. Evit Doue, n'eus ket a denvalijen ag a elfe kuzet ho zorfejou. Pilat a ra ar re greñv ha sevel a ra ar paour a c'houlén digatha sikour. Pa ro ar peoc'h n'eus ket eun den ag en deffe guir da lavaret e ra fall : Mar tiouez dezha facha ouz eun den pe euz eur vro, n'eo ket red dezha diskleria da zen perak. » Job eta, a lavar Eliu, en deus komzet evel eur penn skañv pa en deus goulennet, e kreiz he boaniou, ma plijo gat Dou lavaret dezha perak eo kasset evel ma zeo.


Rebech a reas ive da Job ar gomz-ma : « Petra' meus-me gounezet e chomm eb pec'hi ? » An dra-ze a zo c'hoaz, emezha, tamal an Aotrou Doue evel na ve ket just. Mez Job ne gomze evel-se nemed evit diskuez n'oa ket punisset abalamour m'oa eur pec'heur, kaer o doa lavaret he vignoured. « Mar doun punisset, emezha, petra bennak oun direbech, ne meus gounezet netra e chomm eb pec'hi. »

Eliu a zigass da zonj dezha neuze euz ar pez a ouie dija, da lavaret eo e profit ar zantelez d'an den muioc'h eget da Zoue. Eleac'h kement hirvoudi ha klemm ouz Doue, n'en deus ken da ober nemed soubla dirazha ha diskuez evel se en deus muioc'h a skiant hag a zeskadurez eget al loened mut. Job a dlize beza gortozet ma vije deuet Doue d'he varn e leac'h mont da c'houlén beza barnet.

En eur echui he zermoun, Eliu a lavar da Job e ro Doue digemer d'an holl : « Pell dioc'h distrei he zaoulagad divar an den just, e sao anezha zo-ken var an tron hag e tiazas an tron-ze evit atao. Mar bevont reuzendik er sklavaj pe er baourentez, e hoar ho skandalat evit ma reint pinijen euz ho

fec'hed. Mar selaouont anezha, e ro dezho deiziou leun a joa hag a eürusted ; ma vezont dizent, e varvont dre ar c'hleze. Ar paour hag an den ankeniet, a vezo tennet divarnho ho foaniou hag a gavo konfort en ho glac'har. Ma kar Job soubla ha stoui dirak Doue, Doue a denno anezha a greiz kement-all a boaniou en deus da c'houzañ. Mez mar fell dezha en hem zifen, Doue ne vanko d'her punissa.

Rak eur zotoni eo klask anaoud ar pezh a fell da Zoue, ha n'eus den da c'helloud kompren he oberou. »



IX.

BARN AN AOTROU DOUE.

Joa a ioa en hem zavet ouz ar re nen tamalle e faoz. Brema, pa glev rebechou ag a ioa dleet dezha, e soubl he benn dirak an den a ziskues dezha eo he glemmou c'huero ha pegen hardiz oa gat an Doue en doa hen diskaret. Hogen, epad m'edo kannad an eñv e tigass dezha da zonz peger braz, peger gallouduz eo Doue, an eñv a oue, en eun taol-kount, karget a goumoul du. Al luc'hed a dreuze ar c'hoabr hag ar gurun a groze. « Mouez pounner Doue eo, a lavar Eliu. Job, laka evez mad ha sell peger kaer eo ar burzudou great gat da Grouer. Terrupl eo an Doue-ze leun a vajeste. R'o devezo an dud doujans evit an Hini ne c'hell ket ar furra para varnha he zoulagad ! »

N'hen doa ket perachuet da gomz pa glevhot eur vouez e tont euz a greiz eur gourventen. Mouez Doue e unan oa. Job en devoa her galvet evit lavar dezha perak oa goal-gasset eb abek ha renta dezha justiss. Jehovah en doa selaouet he beden hag a ioa deuet.

« Stard da c'houriz en-dro did evel eun den dis-pount, a lavar ar vouez. Me a ia da c'houlén ha te a respounto. »

Job strafillet, anter-varo, a garje mont da guzet e kaloun an douar.

« Lavar din-me, mar dout den a skiant, e pe le-ac'h oaz-te pa meus diazezet an douar? Piou en deus merket ar vent a dlle da gaout? Var betra eo harpet ha piou en deus lakeat ar mean korn en he blass, epad m'edo stered ar mintin e c'hembann va gloar ha bugale Doue e kana va meuleudiou? »

Piou en deus lakeat eun teven d'ar mor evit he brizounia pa lammas euz a gov he vamm, pa rois dezha ar vrumen evit guiskamant ha pa liviris dezha evit terri he err : Beteg a-ze e teui ; ne di ket larkoc'h hag a-ze e varvo da darziou koun-naret? »

Daoust a te eo a c'heus roet urziou d'ar mintin ha merket he blass d'an abardaez?

A bet out e strad ar mor doun? a bet out e vale e kaloun an douar? A muzulet e c'heuz ehonder an douar? Lavar-ta, mar gouzoud eun dra bennak.

Daoust a te eo a laka da zevel, ar verelaouen, pa vez deuet ar mare, hag a laka ive da zevel stered an noz var an dud euz an douar?

« Anaout a rez-te lezennou an Eñv? Daoust a da zourn eo a daol ar gurun, ar gurun-ze a ia en he hent hag a zistro en eur lavaret : « Setu me ama? »

« Daoust a te eo a ro he freiz d'al leonez hag he zamm d'ar vran? »

« A te eo a c'heus roet nerz d'ar marc'h ha staget eur moueñ ker flour var he c'houzoug? A te eo a laka anezha da lammet evel eur c'hillek-raden

ha da c'hourichal ker kreñv ma spount an dud tro-var-dro. Skrabat a ra an douar gat he dreid ; neu-ze e kemmer penn-err ; galopat a ra dirak an ar-meou ; mont a ra eb aoun dirak ar c'hleze. Ionen-na'ra ; skrija'ra ; devi'ra an hent. Pa zious dezha klevet an droumpill e za er meaz anezha e unan hag e lavar : « Allon ! deomp ! »

« Daoust a te eo a c'heus roet urz d'an er (aigle) da nijal a-zioud ar menezioù ha da ober he neiz var eur garrek a ne c'hell den pignat varnhi? Ac'hano e sell ouz he breiz hag he lagad lemm a vel anezhi a-bell. Rei a ra goad da eva d'he re vihan hag e kement leac'h ma zeus-eur c'horv maro e lamm varnha. »

« Te a poa c'hoant da zisput ouz Doue. Petra eo did eta brema chom mut? An hini a gav abek e Doue a dle gelloud respount dezha. »

Mez Job a ioa tec'het dioutha peb c'hoant da zisput euz he Grouer. « Aotrou, emezha, me ne d'oun nemed eun draik dister. Komzet e meus evel eun den diskiant. Penaoz e c'helfen-me respount deoc'h. Ne meus ken da ober nemed lakaat va dourn var va ginou. Perak n'oun-me ket chommet eb kaozeal? Brema e tiouallin na greskfén va fazi. »

Goude beza dispaket dirazha ar burzudou euz ar bed ha diskuezet dezha ne deo nemed eun netra, Jehovah a zesk dezha c'hoaz pegen diskiant eo an den a gred tamal gouarnamant an Aotrou Doue. « Stard da c'houriz en-dro did evel eun den dis-pount. Te c'heuz kavet abek em justiss ha goulennet en hem zifen da unan. Mad. Respount brema. »

« Daoust a da vrec'h a zo ken nerzuz ag hini Doue ha da vouez ker pounner ag he hini? Guisk

ar pezh a c'heus a gaerra ha pign var an tron. Diskar an den orgouilluz ; prad an den fier ; bruzun an den dizoue ; kuz anezho er bouldren ha taol anezho er foz. Anzañ a rin neuze e c'heus nerz aoualac'h evit en hem zavetei. »

Nan. An den n'eo ket goest da gundi ar bed ; ne ouffe ket zo-ken lakaat da zuji dezha an anevaled krouet gat Doue.

« Sell ouz Behemoth, marc'h an doureier hag a zebr foenn evel eun ejen. En he ziu-groazel emañ he nerz. Sevel a ra he lost er vann, evel eur blanten sedr ; he eskern a zo korzennoù kouevr-hasteañ ; he izili a zo barrinier houarn. »

Var ar menezioù e kav he voued hag al loened euz ar meziou a deu da fringal en-dro dezha. Kousket a ra en disheol, dindan eun doen raosk pe dindan an halek e bord an dour. Na pa ziousse d'ar ster kreski, n'en deus ket aoun. Rak sonjal a ra dezha e ve goest da lounka dour ar Jourden.

« Gouskoude ne vezo ket diez da baka gat eun higen evel eur pesk ha gat peulioù sanket dezha a dreuz he fronellou. »

« Ha Leviathan ! ag her paka' ri-te ive gat an higen ? A staga' ri anezha divar bouez he deod ? A lakaat a ri dezha eur c'hele'h en dro d'he javed ? A kredi a rez emañ e vont da bedi ac'hanod ha da lavaret did komzou flour evit gounid da c'hrassou mad ha beva evel da sklav ? A sonjal a ra did e c'helli c'hoari gatha evel gat eul labouss ? Laka da zourn varnha eur vech ebken ha ne pezo ket a c'hoant da zistrei. Den ne gredfe dihuna al loañ spountuz-se. Piou eta a elfe herzel dirazon-me ? »

Evit diskuez sklerroc'h c'hoaz pegen dic'halloud

eo an den, zo-ken dirak eun anevaled, Doue a ra penn-da-benn da Job patrom al Leviathan.

« Piou, emezha, a zigoro dezha he c'hinou ? En dro d'he zent, emañ ar spount e chomm. He gorr a zo goloet a skant, stag an eil ouz eben ha kaled evel dir. Bep tro ma strefch e laosk torchadon tan hag he zaoulagad a zo sklear evel ar goulou-deiz. Dont a ra tan euz he c'hinou, ha mogidel euz he fronellou evel euz a eur gaoteriad dour bero. He alan a laka an tan da gregi er glaou. He nerz a zo en he c'houzoug hag en he raok e vale ar gernez. He izili a zo stag an eil ouz egile ha pa gouesse varnha ar gurun, n'en deffe ket an disterra drouk. Pa vez guele, an dud hardissa a gren gat ar spount. Na kleze, na lans, na bir, n'ellont herzel outha. Ar mean kasset gat holl nerz ar valtam ne ra ket memez hillig dezha ; kuez a' ra varnha evel eun tam kolo hag ar morzol e skei varnha ne deo ken nebeud nemed eur goloen skañv. Pa zisken er mor, e laka anezha da virvi evel en eur gaoter ha dre ma za, e lez var he lerc'h eun erven hir a sklerijen. N'eus den, var an douar, ag a elfe dont arbenn anezha. Krouet eo bet evit n'hen devezo aoun rak netra. N'hen deus ket he bar e touez al loened kriz ha gouez. »

Job a zelaoue eb lavaret ger ; mez stoui a ra dirak an Doue a ioa e paouez digass da zonj dezha euz he c'halloud. « Gouzout a ran, o va Doue, emañ Job, o c'heus peb galloud ha ne deus netra kuzet evidoc'h. Komzet e meus evel eur sot a enep deoc'h hag euz a visterioù savet huel dreist va skiant. Kredet e meus lavaret deoc'h : « Va zelaouit hag e komzin. Mez betek-hen n'oc'h anavezen nemed

dioc'h klevet lavaret. Brema e meus ho kuelelet gat va daoulagad. Setu perak e meus keuz leiz va c'halloun hag e fell d'in ober pinijen er boultren hag el ludu, »

Doue ne c'houlenne digat he zervicher mad nemed an akt-se a humilite evit rei dezha rekompans. Lavaret en deus, evit guir, eur gomp treuz bennak ha re c'huero. Mez rebechou he vignouned eo o doa her lakeat da glemm, hag ar re-ze a dlie beza tamallet ha nikun all. Setu perak Doue o komz oc'h Eliphaz euz a Deman a lavar dezha. « Fachtet braz oun ouzoc'h hag ouz ho taou vignoun abalamour n'oc'h eus ket bet eul langaj freaz hag eeun evel hini va zervicher Job. C'hui a ginnigo eur sakrifa a binijen evidoc'h. Kemerit evit kement-se seiz taro ha seiz maout ha kit gatho da gaout Job. Job a bedo evidoc'h. Me a zelaouo he beden ha ne rin ket deoc'h an drouk a vije dleet d'ho komzou dibarfet. Rak no c'heus ket komzet dirazhon gat kement a furnez a va zervicher Job.

Diskaret d'ho zro, Eliphaz euz Theman, Baldad euz Suha ha Zophar euz Naamath, a ieas ac'hañs hag a reas ar pezh a ioa gourc'hemennet dezo gat Jehovah. Jehovah a zelaouas peden Job.

Goude m'hen doue Job pedet evit he vignouned, Doue en tennas euz ar stad truezuz great dezha gat Satan. Rei a ra dezha daou-c'hement all euz ar pezh en deus kollet. Eb dale, he vreudeur, he c'hoarezed hag he anaoudeien a deuas da breja en he di. Truezi a reant outha ha klask a reant her c'honsoli var bouez ar poaniou digasset dezha gat Doue. Pep hini anezho a roas dezha e prezant eur penn danvad hag eur rulien aour.

Jehovah a vennigas adarre Job kaerroc'h eget en dro genta. Ne zaleas ket na oue perc'hen da bevarzek-mil danvad, C'huec'h mil kanval, mil koublad ejenned ha mil azenez.

Doue a roas dezha ouspenn seiz map ha teir merc'h ; ha ne oa ket dre ar vro ker koant a merc'hed iaouank Job. Rei a reas dezho ive ho lod en he heritaj evel d'ho breudeur.

Job a vevas c'hoaz seiz-ugent vloaz. Guelet a reas he vugale ha bugale he vugale beteg ar pevare rumm hag e varvas goudeze eüruz ha leun a vlaveziou.





X.

DOUE HA SATAN.

DOUE ha Satan a glask o daou kaout kaloun an den, evel or beuz gueleit en istor Job. Satan, an eal tanfoultret, a oue koll en taol-ma. Job, daoust dezha da veza goapeat, rivinet, kollet he vugale, goloet a c'houliou euzuz, tamallet gat he vignouned da veza eun den fall, Job a zalc'h mad evelato da Zoue. Abalamour ma c'houzanve a galoun vad he boaniou e rente gloar da Zoue ; rak eur viktor oa gounezet var Satan, he adversour touet.

Job ne elle ket koumpren perak e tirolle varnha kement a drubuillou hag ar c'heaz den lor a c'houlenne ennha e unan perak e ranke an den divlam kaout kement da c'houzaon. Eb mar, an den a dremen dre ar boan abalamour d'he bec'hejou (hag e pe leac'h ema an den dibec'h penn-da-benn ?) Tremen a ra dre ar boan evit netaat he galoun sotret gat an techou fall. Ia ; mez, dreist-holl, tremen a ra dre ar boan evit gloar Doue, evit diskuez dezha karantez hag ober mez d'an diaoul, adversour da Zoue ha d'an eneou. Sulvui e c'houzaon a galoun vad, sulvui a garantez a ziskues ; ha sulvui

ive e plij da Zoue an ene leal ha santel ne fell ket dezhi pellaat dioutha.

Evel-se, Job a zo roet d'eomp evel skouer gat Doue e unan. « A gueleit o c'heus, a lavar da bep hini euz he vugale, va zervic'her Job, an den-ze eeun ha leal, den a zoujans Doue ag a ziual rak ar pec'hed ? » Hag evel Tobias deuet dall hag eat da baour, peb hini e kreiz he boaniou a zonj en den santel Job.

Gouskoude, e sonj an Aotrou Doue, Job n'oa nemed ar skeuden euz an hini en deus bet ar muia da c'houzaon er bed-ma, euz an hini en deus kemeret evit leshano : « Den a bep glac'har. »

Eun deiz, e veljot var an douar eur roue, galloudusoc'h ha pinvidikoc'h eget Job. Rak Doue oa ; ha peb tra krouet a zo dezha. Hen oa ar zant dreist an holl zent, *Sant ar zent* ha lavaret a elle gat muioc'h a virionez c'hoaz eget Job : « Piou a damallo d'in-me an disterra pec'hed ? »

Gouskoude an diaoul a demptas anezha evel m'hen devoa great da Job. Mez, fidel da Zoue, he dad pehini' zo en eñv, e lavaraz dezha grouns : « Tec'h diouzin, Satan ; me ne zervichan nemed va Doue. »

An diaoul 'en hem dennas neuze e kaloun eur rummad tud a ioa adversourien touet da vap Doue en hem c'hreat den. Map Doue oue koundaonet d'ar maro, skourjezet, kurunet a spern. N'oa mui nemed eur preon douar a vez bruzunet dindan an treid, izeleat, goapeat ha merzeriet goassoc'h c'hoaz eget Job var an teil. Gat muioc'h a basianted c'hoaz eget Job, ne glemmas morse nak euz he ziskibien o devoa hen dilezet, nak euz ar vourrevien a skoe

gatha hag her goapea nak euz he dad en doa kon-daonet anezha da vervel var ar groaz. Pa edo e vont da denna he huanad diveza, e krias : « O va zad, perak o c'heus-hu va dilezet ? » Ar c'homzouze n'hen doa ket lavaret evit en hem glemm, mez evit lakaat da vir diviz-ar profed.

Eürussoc'h eget Job, Jezus a anaveze mister an daelou hag ar boan. Pa ziskennas er-bed-ma en devoa lavaret : « O va zad, ne fell ket deoc'h mui euz al loened oar kustumet da ginnig deoc'h e sakrifis. Setu me en hem ginnig deoc'h e sakrifis evit ho kloar. Ho kloar, o va zad ! Ho kloar ha nentra all ouspenn ! »


Ar roue-ze eo an hini en doa Job esper da velet pa lavare : « Me' gred eo beo va redamptor hag e velin anezha gat va daoulagad va unan. » Hag ar redamptor a deuaz a benn tri dervez a varo da veo evit beza lod hag eürusedd ar re a lakai ennha ho fizians.

Evel en doa great evit Job, Doue ive hen tennas euz an draonien a boan evit hen digemeret en he balez. Eno, dre urz he dad, e ped, evel Job, evit he vignouned, e ped evit ar c'heiz pec'heurien en deus prenet gat ar priz euz he c'hoad.

Ha pa en deus bugel Adam, mignoun da Zoue evel Job, perachuet he belerinaj er bed-ma da heul ar Redamptor, neuze an iliz santel, mam an holl dud, a skuill daelou var bez he c'hrouadur. Kana' ra en he gichen klemmou den lor Huss. Eveldha, e c'houlouen trugarez evit an hini a zo skoet gat ar maro hag e lavar ar c'homzou kaer-ma a esperans : « Kredi a ran e zeo beo va redamptor hag e savin gatha a varo da veo, hag e velin anezha eun deiz gat daoulagad va c'horv. »

Job en deus roet er bed-ma konfort d'an den a zo e poan hag he gonsoli a ra betek en he arched.

Setu penaoz e tibab Jehovah tud santel, ne ket ebken e touez he bobl, mez e touez an holl boblou. E peb leac'h, e kreiz gouelec'h an Arabii evel en Israël e kavet guir zervicherien da Zoue, mignouned d'an Hini Santel dreist an holl, d'ar Redamptor promettet da Adam, d'an Hini a dlle dont da zavetei bugale Abraham hag an holl boblou euz an douar.





TAOLEN.

	PAJEN.
I. Ar mestr braz	5
II. Poaniou	8
III. An tri vignoun.	11
IV. Job tamallet.	14
V. Eil abaden	24
VI. Trede diviz	32
VII. Ger diyeza an den tamallet.	40
VIII. Diviz Eliu.	46
IX. Barn an Aotrou Doue	51
X. Doue ha Satan.	58





Imprimerie N.-D. des Prés. — Ern. DUQUAT, directeur.
Neuville-sous-Montreuil. (Pas-de-Calais.)